

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

28. (UR GWALLER)

Nag ann Diaoul, ann esrouant
 a vez o tenti ann du iaouank
 hag a ra din-me en em rei
 d'ar giriegez^o da bec'hi ° = occasion
 Me meuz eur plac'h, eur giniterv
 koanta plac'h a zo er c'hartier
 ha me eunn dervez dreist pep tra
 he fedi da zont d'am zi da leina.
 pa (oe)^o debret hon repaz ° Un dra bennak evel
hou a lenner goude pa
 ha me krapa enn he breac'h
 ha pignat ganthi d'an neac'h
 nedon ket eat mad er gramp
 na lirez dezhi va zantimant
 va zantimant pe deuz klevet
 Teir gwech d'an douar ez (eo) semplet
 ha goude pa ze dizemplet
 d'he zountoun e deuz lavaret :
 - O va Doue, ha possubl^o e ve °a-us : red
 ve va c'henderv am dizenorfe!
 ha me pa'meuz he c'hlevet
 va mouchoer amez divisket
 hag enn he ginou meuz he lekeet
 Rak pam boa pec'het ganthi
 e sonjiz laza anezhi.
 ha me mont d'ar /jardin/^o da doulla ann douar °a-us:liorz
 pedon o toulla e teuaz form eun aneval
 henvel oc'h form eur c'hi;
 mennout a reaz dezhan va dibri.
 Kaer am boa her c'has kuit
 n'e dea ket diouzin
 setu ma oen oblijet da grial
 ann amezeien oc'h va c'hlevet
 raktal^o d'ar jardin a zo deuet ° skrivet dre fazi :
raklat
 ha va zorfed zo anavezet.
 neuze ez unnn bet barnet
 da veza va esker^obruzunet ° esker (sic) eme
Ollivier
 gant taoliou houarn ha barren.
 Me ho suppli, tud iaouank me ho ped,
 pa viot gant an diaoul tentet,
 da bedi Doue hag ar werc'hez
 da dec'het dioc'h gwall gompagnunez

(Notenn : Aes eo merzout e lenne Ollivier ESKERN. Aes awalc'h e vefed aviz gantañ. Rak c'hoarvezout a ra gant Milin amañ hag ahont ober fazioù: uheloc'h hon eus kavet raklat evit raktal. Met Gonideg 1821 en deus 14 linenn war ar ger esker, diimplij hiziv an deiz d'an unander, emezañ, anavezet hepken en niver daou : diou esker, div esker, divesker... Kenderc'hel a ra avat : " dans la construction d'un navire esker est ce que les charpentiers français nomment genou, et que les Gaulois apparemment nommaient jambe. ESKER DOUN, genou de fond, ... ESKER KIL genou de revers..." Pa soñjer en deus renet Milin e vuhez e Brest e-touez ar vrezhonegerien a laboure war dro ar porzh hag al listri, n'eur ket re souezhet en defe kavet ar ger-se en implij en unan eus ar c'hanaouennoù das-tumet gantañ. Pa soñjer ouzhpenn e kaver e Barzaz Breiz p.99 :

En dro d'he ziousker dren daou skoulm all e c'hell bezañ oa anavezet c'hoazh ar ger en e furm digevrennek : esker, sker (?).)